

«POBL VREIZH»

B.P. 304

29273 BREST-CEDEX

*Kelaouenn visieg*

**Komanantoù**

Boutin : 20 L. Skoaz : 30 L.

C.C.P. 2746-79 Rennes

MEZHEVEN 1976

NIV. 77

2 LUR

# POBL VREIZH

## Fall an traoù gant ar rapariñ-bagoù e Breizh



*Micherourien an A.F.O. o vanifestiñ dirag ar PAC, d'an 19 a vis Mae*

*igweled p. 31*



## JAKES AR MEUR HAG AR BONEDOÙ RUZ

Plaset eo bet hon tud koch, ar Bonedoù Ruz, gant de Chabrous, peogwir o doa kredet an em sevel a-enab d'o gwaskerien, poated an talhou ha noblañs-ou Breizh... Tri c'hant bloaz goude, pere eo ar Bonedoù Ruz, amañ e Breizh ? N'eo ket diasa... ar sindikalisted ha piv bennag a zegas an tammig reus e-barzh eurzh ar vourc'hien.

Dall eo an Itron Justiss, e vez lâret. Dall, nebu ha didreuz... Feiz ! N'eo ket ! Skoñf ! ra ruzoc'h war ar re a zireñk ar vourc'hien un disterrañ. Ar justiss n'eo ket justiss, med ur «justiss» gret evit ar pennoù bras... «D'an traon ar justiss-klass», a huc'he ar vanifestanted e Kemper, d'an 3 a vis Mae diwezhañ, da voe gouezet e oa bet kondaonet Jakes ar Meur da baeañ 500 L da deli-gestiz ha 270 L da deli-zigoll... en harnv al lesenn «eneb-dralhierien».

Darimp war hor c'hiz un tammig ! d'ar 15 a vis Ebrel 1975, e oa bet savet ur vanifestadeg gant ar sindikadoù, evit herpañ grévetad ar CRMA ha re ar c'h-Crédit Agricole. War an hent bras, damdot d'ar Faou, e voe lakaet an otomobilisted da chom a-sav ida arretañ ! N'eo ket gant ar jardiñned, med gant tud deus ar sindiked CFDT-Labour-douar, evit goudeñ digant pep heni anebe beb a 5 L euid ar re a oa en grev... Diouzh an abardas, e Kemper, manifestadeg diarg ar c'h-Crédit Agricole. Echu 'oa pep tra, ha setu ar mestr bras deus ar c'h-Crédit Agricole o vont tremas e wetur ; neuz, sarfent, en defe Jakes ar Meur, gant e zougant serret, toet ur gwiskad tasloù da wetur an aotrou, ha brewet aneñ, pe dost ! Biskoazh kemend-all ! Ha setu kaset ar paotr Jakes diarg al les-vern. Un hanter deus an testoù renerien all deus ar

c'h-Crédit Agricole a oa war an dachenn a savas a-du gant o fennener, evit lâret e oa gwir, e oa bet kasiment distrujet e garr-tan dehañ, gant Jakes ! An testoù all, hag a lâre ar c'hontrol, n'int ket bet selloc'et. Bewet ar justiss nebu reuze ! Aessoc'h 'vo kompren ar perag hag ar pennoù deus an traoù pa vo degasset da soñj piv eo Jakes ar Meur ; unan bet issaisisset dija diouzh ar c'h-Crédit Agricole, dresa ! Achanta, ya, er mod-se e kompren !

Tremenet eo ar justiss, evit ma ra an Ankoù gant e falc'h... Larnet he deus ar justiss ar mouch a vez gant, sarfent, war he daoulagad, evit gwelad piv 'oa ar re damallit. Da c'haat no aet ar justiss. Hag ez eo kouezet ar setañs ! Jakes ar Meur en devo da baeañ, ha nav deus renerien Burew-departamant ar FGA-CFDT zo bet kondaonet da zaou vis loc'h, gant «suisis»...

Ar vourc'hien, ar batronead, ar kapitalisted, emañ ar varnerien a-du gante. Gant ar vach ! Braw eo lakaet al lesenn «eneb-dralhierien» da c'hoari pa garr.

Med diwallit, flasterien ! Galwet gant ar CFDT, ar CGT, ar FEN, ar PC, ar PS, ar PSU, UDB, SAV, ar JOC, ar JOCF, ar Yaouankioù Komunist, ar Yaouankioù Sossialist, al «Ligue des Droits de l'Homme», hag an «Association Populaire Familiale», 800 den o deus manifestet e Kemper, evit herzi ouzh ar pezh emañ o klask ober d'ar sindikadoù ; emañ o klask brewh anebe, o klask torri o nerzh, hag emañ dreist-oll o klask lekad poated ar sindikadoù-labour-douar da blegañ ! evelse ne vo ket mui mestr ar pennoù war e labour na war e zougad na war frouezh e labour, peogwir eh a ar re-mañ al lodenn

vrasañ anebe d'an nebeutañ, gant ar re a lak ar gris warneg hag a werzh anebe e-giz ma karont.

Un dafner bras eo ar sindikadoù evit ar batronead hag ar kapitalisted eus ar «Europa C'hlass, ha setu perag emañ ar re-mañ o klask kass anebe d'an traoñ. N'eus justiss ebed ken : aet eo a-du gant poated an c'harant bras.

D'ar 24 a Vezhven, e tle ar b-Prudomed respont da Jakes ar Meur, hag en deus douget klemm, dre m'eo bet issaisisset dre vil ha dre c'haou ; lakaet en doa e harnv evit brewh delege al labourien. Trawalc'h evit skarzhañ aneb ar-maes, evel-just.

Al lesennou, ar justiss, emañ lakaet pep tra d'an em gavoued evit brasañ mad ar re finañ hag ar re binwiked. Mil boent eo c'hañch penn d'ar vach ! Ar vourc'hien hag ar kapitalisted d'an traoñ ! Ar pennoù hag ar micherour mestr war o labour !

### GERIOÙ N'INT KET GWALL ANAVEZET

nebu : neutre, impartial ; tell-gestiz : omende ; tell-sic'heo : domanges ar interêts ; lesenn «eneb-dralhierien» : loi anti-casseurs ; tremas : vers ; les-vern : tribunal ; pennener : directeur.

## UL LESENN ENEB AL LABOURERIEN !

Al lesenn «anti-casseurs» oa gret, ouzoc'h a-walc'h, evit pinijañ ar pennoù kleiz a vese o trailhañ traoù ser manifest, med biken, lâre Pléven, ministr ar justiss d'ar mare-se, ne vefe impliget eneb ar re a vanifeste evel eo deet, biken ne vefe impliget eneb al labourerien...

Koulskoude, n'eo ket start gwelad e vez impliget al lesenn-se gant poated ar gouarnamant da zamessad al labourerien ; kavoud a ra dehe eo erru poent gourdroù hag ober son d'an ouvierien ha d'al labourerien-douar en ur lekad kondaonet un nebeud sindikalisted bew. Nevez 'zo zo bet dau rum stourmerien kondaonet e-giz-se barzh an departamant (29) :

Labourerien-douar eus koster Kariase a oa bet barzh Min ar Roue o harzañ hag o listargañ ur c'hampion leun a vach o tont eus ar Belgik heb ar egerantie sanitaire, kaid oa ar c'h'hevred gant ar mouch, hag ar c'h'ig mouch kavimant evit netra. Er proesas kentañ e gant bet laosket da vont gant les-vern Montroulez ; med galwet-int bet en-dro da vont da Roazon, hag eno int bet kondaonet, lod d'ur mes prison, lod all daou vis, gant «suisis». Gwasañ tra zo eo bet kondaonet E. Taliec, sekretour FDSEA kanton Kariase, ha ne oa ket war an dachenn, ha goude m'eo-doa, herwez ar

barner, klaset sioulad e gamaraded... Kondaonet abalamour d'al lesenn «anti-casseurs» ar re zo barzh penn ar sindikad pe ur strollad eo a vez korig ma'h a o c'hamaraded da vanifestañ ha ma vez bec'h ha trubuilh. Ha seul tont ma vez kondaonet ur pennoù ar mod-se, e rak mont d'ar prison da vad, ma vez tapet adarre evit an disterrañ digarez, hag ober foat-boutik !

- Grévetad al Labour-douar (micherourien ha tekianised) a oa bet o vanifestañ ar Faou, war an hent bras etre Brest ha Kemper, o ruiñ traoù d'an dud barzh o otoiou. Setu unan, ur beajour korfers eus tu Brest, unan re fin, o klemm war zigarez oa bet dilafest gant ar vanifierien... Ha galwet ha tamallet sindikalisted FGA-CFDT Kemper, deg dioute a zo barzh burew an departamant ! Digarez oa bet torret gouloù ur c'h'barriant, ha heget tud da brenañ un tiked 5 Lur da sikour ar c'h'hevred... Daou vis prison evit an dro-se ! Al lesenn «anti-casseurs» ! Kler o-deus bet al labourerien hag o sindikajoù manifestañ a-du gant poated ar CFDT barzh Kemper ha lec'h all, kler o-deus bet strolladoù an tu-kleiz (UDB en o zouz) difenn ar sindikalisted... lañset eo ar gouarnamant hag ar justiss da dorriñ ar sindikajoù ha da spontañ ar re zo prest da

stourm. Ha 'nes charch penn d'an traoù, 'talc'ho poated an tu-dehou hag ar batronead da ruiñ nebeutoc'h frankis bepred d'al labourerien.

### GERIOÙ DIAES DA LOD

penn-kleiz : tête, rebelle ; tête de lard : dommesad ; dompter : herzañ, herzel ; foire obstacle : s'opposer, foire opposition ; foat-boutik : faillite ; dilafest : retardé ; 'nes cheñch : zino ne vez ket c'hañchet.

## AR FALZ

kelaouenn d'rimiseg an Enzaou diasezet gant Yann Sohier bodet ennañ skolarien ha kelennerien Vreizh a-du gant eur skoll vreizheg ha talc' gwirion

Lennit Ar Falz ! Komantanit d'ar Falz ! (30 Lur euid 6 niverenn) Ar Falz, 29245 Plourin-Montraoules C.C.P. 430-20 H Roazon

## DONVIN LABOURERIEN KORLE

Trec'h'ho war al labourerien ne oa ket trawalc'h evit ar c'h'hañ karfant-se hag e wraevien, larnañ, evel a s'arve just a-walc'h Ouest-France, e fess dehe ober mestr d'al labourizion zo bat trac'her !

### GERIOÙ DIAES DA LOD

distrujet : dommesad ; dompter : herzañ ; neutre : biken ; sans : n'eo ket eneb ; cheuch : foire opposition ; foat-boutik : faillite ; dilafest : retardé ; 'nes cheñch : zino ne vez ket c'hañchet.

### Lakad grévetad Korle da blegañ ha da serñf, ha gant-se do'viniñ labourerien Bro-Gorle, setu, amañ-hañ, soñj kalz tud :

Bourgoin, patron an usin da lac'hañ yer ; juldod an dro, mestr Korle-Uhel en o fenn ; pennoù bras Sant-Brieg, peogwir an-deus kaset ar prefed e archerien da zistovañ an hent d'an nann-grévetad. Passort kont zo gant labourerien Korle ?

Abaoe mis Meurzh, evel ouzoc'h, emañ en grev evit goull ur pae uhelloc'h lur plac'h en mas C'hevverer a c'honeze 1 197,00 Lur, hag ur paotr a vese bemnos war an heñchoù gant ar gamioù, 1 899,00 Lur... hag evit difenn ar sindikad CFDT nevez lañset barzh an usin.

Siwazh, tallañ eo an traoù abaoe ar penn kentañ : nebeutaet ar c'h'hevred lan hanter eus an ouvierien zo adroget da labourad, setu e c'hall an usin mont en-dro ; ha bewech m'o-deus klasaket harzañ ar re all da labourad hag an usin da droñ, int bet distrujet kenkent gant ar patron hag e wevelien barzh ar journal, reg ar re-mañ a oa an tu da larfañ gwier !

Braw eo d'ur patron c'hoat barzh Korle, evel lec'h all Turch kreiz Breizh, peogwir zo kement a dud o klask labour, kement a re yaouank dilabour, ha peogwir eo ken gwan ar sindikajoù 16 % hebken eus an dud o labourad zo micherourien. D'ur patron stenn evit Bourgoin n'ao ket bet start ober fent gant ar Vretoned ; prest eo da serñf an usin, a lâre heri lre all en-deus koster Paris ; gwelloc'h e oa an dro-se evit bezañ dilabour, gwelloc'h euid mann ebet, a respont ar juldod wenn ! Er mod-se eo deit a-benn da s'arh meak ha distiz barzh o spered, ha setu mestr Korle-Uhel lec'h emañ tachenn an usin... o heurtañ an dud da s'arh ul licher... eneb an ouvierien !!!

Ha peogwir ne soñje ket CFDT Rostron e oa red gwelad sindikajoù pe strolladoù all da sikour, n'eo ket bet kalz tud o harpañ labourerien Korle, med heñnennou o tastum ar c'harant hag o tont di e manifestadegoù.

Setu pennoù eo ymett labourerien Korle bremañ, ha 'zo deit spered d'ur patron ha d'ga gamaraded roñ ur gentel da labourerien kreiz Breizh : ne vo ket adkennet, a lâre heri, ar re zo distrujet diouzh o labour ! Pa n'eus mann ebet al barzh an dro na barzh ar c'h'heñou tostañ (al lac'herien yer, mouch ha peaked en em glev madi, e vo red dehe mont kuit. Ur gentel aas da gompen ; roñ peoc'h pe mont out !

LEVRIOU BREZHONEG TI GIRAUDON 30, strada GERANPONT 22300 LANNUON Pg. 35 04 90

## DISKROG-DEBRIÑ EN ORIAÑT

A-c'houde, ar 5 a vis Mae, e-barzh kript iliz Sant-Loeiz, en Oriant, e oa Andrew AR GALL ha Beltram KIVILIER e touevriñ boued ; ne vije gete nemed dour... Dinerzh e oant aet ; setu, d'ar 24 a Vae, emañ bet kaset d'an ospital...

Perag e chomont heb debriñ boued ése ? Evid roñ da oued d'an oil emañ a-du gant Perig LOQUET. Toullbac'het eo Perig LOQUET a-c'houde ar 4 a vis Eost 1975 er c'h'ant, dre ma oa bet tamallet dehoñ boued klasaket diarg DDA an Naoned.

E-leizh a Vretoned zo bet toullbac'het e-pad an harnv hag an distra-hañ diwezañ. Dibrisont int bet rac'h. Nemed Perig LOQUET.

Karlv eo Perig LOQUET, ha droig en deus e-barzh e c'har zete ; kehid-all eo chomet prison, n'eus ket bet graet ar dro gant ar vedisionourien ha marse a vo red troc'h'ri e c'har a-zoc'h'hoñ. Artañ en deus ive beg e vemprou. Perag, ar zigarez klas ar winozed, derc'hel un den e ragrison ése, peogwir eh eo ac'hu enklask ar barner a-c'houde ar 6 a vis C'hevver ?

A-c'houde an 19 a vis Ebrel ive emañ Perig LOQUET e ober un diskrog-debriñ.

N'omo ket a-du gant ar re a ra gwiall-dalloù, henn diskleriet hon sus lies, mes heb boued a-du gete e c'haller kompren perag eh aont gant an hent-se. A-c'houde bladoù ha bladoù eh eus strolladoù politikel, kulturel, relijiel, ha sindikal e stourm en ur chomel fidel d'al lesennou, evit ma vo roet d'ur pab, a-benn ar fin, kement ha zo red evit bewiñ hevez e c'hoant. En desped da gement-se, an desped da Garta ar Broadod Unanet, en

desped da emglevioù Helsinki, hag a zo bet sinet gant ar Frañs, n'eus netra c'hañchet evit pab bladoù : ne vez ket sellet dou'hoñ ! A ur wir bob ! ne vez ket roet e lec'h d'ar brezhoneg... ur yoc'h tud emañ red dehe moned kuit-se o bro, abalamour d'an dilabour ha d'ar pennoù lañ ; distrujet eo bet, dre vil, Bro an Naoned, a-zoc'h Breizh...

E mas Here 1975 en deus klasaket ar gouarnamant Rostron ar re a zoig, uhel, banniel Breizh ; kuzhet eo bet e-barzh d' 150 Breizhad ; 63 anebe zo bet arestet ha 13 zo bet tamallet élar abegoù distar al lesenn.

Ar zigarez lakaet an droñ ar re a ra gwiall-dalloù, ar peñh an deus klasaket ar gouarnamant, eo c'her son d'an oil re stourm evit Breizh, hag o gwiall-vreud diarg ar Vretoned arall. Ur sigwall a gresenna (d'ar c'opinion) a vez graet a gement-se, ha tamallet an dud evit ur sigwall a gresenna, ar re zo a-enab d'an demokratelezh.

Ar frankis evit Perig LOQUET !

### GERIOÙ N'INT KET ANAVEZET EN OLL RANNYEZHIOÙ

A-c'houde : abaoe ; al : evel ; eneb : distra-hañ ; distra-hañ : rac'h ; uell : euzec'h ; tek : diouzh ; lies : o lies ; bladoù : blo-wedhoù ; bewez : herwez ; ur yoc'h tud : ur bern tud ; roñ da oued : roñ da 'hoed.

### GERIOÙ DIAEV DA LOD MARTEZ

diskrog-debriñ : greve de laim ; ragrison : détention préventive.



Setu amañ, bremañ, an deus un o-deus dilabour da serñf herzi

## Gouel an unanidigezh en Naoned

Kement-hañ deus perzh UDB e Gouel an Unanidigezh en Naoned, d'ar 25 a vis Ebrel, en desped d'ar pezh na blijñ ket d'he klaz : bezañ masket ha kemmaet gant strolladoù kulturel nemedek. Gouel a ouie evad UDB e oa un touell ewid an oil lakaad da gredañ a oa possibl ober ur vanifestadeg dibolnikel. E gwirionez a klaske ar vourc'hien sevel ar Gouel heb harp an tu klez.

Gant son bras eo bet digoret ar gouel d'ar c'hoastadennoù politikel... Pewarzeg pwezenn zo bet graet, unan aneñ gant ur paotr eus UDB hag e vo kavet un diverrañ aneñ amañ da heul.

Gwilet eo bet paotred UDB o pegenñ skitellioù a-raog ar gouel : ar re all n'int ket bet gwilet kalz. Gwilet ez eus bet paotred UDB e-lezh da zelaer ar gouel.

Berzh en deus graet ar gouel, gwir eo : 5 000 den (ha marteze music'ho) o c'houlenz a vele adstagnet departamant an Naoned ouz ar pepar departamant all, se n'eo ket diwallus. Gwerzhet o deus paotred UDB, Le Peuple Breton, Pobl Vreizh, hag al leviz La Loire-Atlantique Bretonne.

Gant ewizh bras o deus selouast ar re

yaouank predig paotr UDB ha degemeret med eo bet gante, evel ar re graet gant ar PSU, ar PS hag ar Falz. Ewel-henn a komz Aldrig Russion eus Burew Politikel UDB :

«Piv zo kirieg deus di-parti Breizh ? Paotred an afezioù, re ar Gambro-Gofivers, ket ar gouarnamant, hag al labourerien. Un dro-gamm savet gant ar kapitalistad eo krouidigezh ar Pays de Loire. Klask a raer krouidigezh an ekonomiezh ha berzhañ an arc'hant. 86 den zo bet kaset da get gant droug ar c'hreisañ, ha divar se, 20 000 dilabour er goañv tremenet. Divar se ivez, e vez gwasket war ar sindikalized, kaset racherourenn drag al les-vern (SOTRAMEC), lakaet al labourerien douar da goll o douaroù pe o droed da labourad. Red pegenñ a kement degouez zo : ewid mont gant un hent bras, ewid tremen war ur pont...»

Lärom ur wech c'hoazh : n'eus tamm diforc'h ebet etre ar fouge en-dro d'ar «Rebelleu» ha troual al : an toull ewid al labourad, an dilabour, divroañ ar re yaouank, ar paeoù isel, live-buhez isel al labourerien-douar, ar gwaskerezh war ar vicherourenn hag ar besanted, mougdur hon kultur...»

OLL assemblies ewid Bro-Naoned e Breizh !  
OLL assemblies ewid hon pobl unanet !  
OLL assemblies warzu ur vro sokialour !

## Brikoloù glaswer Sant-Stefan

Ma n'ho-peus ket pignet c'hoazh brikoloù glas-gwer skipañ Sant-Stefan, n'oc'h na Frañsisian vad, na gwir vignoned eus ar fobal.

An dud, leun o c'hoz, o diwakourenn hag o daoulagad gant ar glazur, (pebezh saladenn, tudou !), an dud eta, a soñj) dehe ez eo trawalc'h gouzoud n'eo ket bet lakaet abred a-walc'h ar paour-kazh glasaer ROCHETAU (pe ar paour-kazh glasaer, ma kavit gwelloc'h), da bitrotad war ar c'hlasenn.

Chomet int da c'henaoegal (maev) daliet gant an tala livet en glaser, ha n'eo-deus ket gwilet med divaev ar fobal. Taolomp eta ur seil a-gom ouz an traoù diabarzh. N'eo ket ar stal skipañ Sant-Stefan da stal c'hoazh, pell ac'hañ ! Ha liv an esperañs (glas pe wer, n'eus forzh !) zo deuet da vezañ tamm-ha-tamm melen evel an douar.

An dud a oar kontañ na zebront ket o ed en glas, se zo skiler, hag ed skipañ Sant-Stefan n'eo ket puzerour c'hoazh med emae mare an eot bras war dostaad memas-tra. Ar c'hoarieren zo bet prometet dehe, ar wech-mañ, bab a bemp milion (koc'h) gant ma vez set ar maout gante.

Pa vez klevet skipañhoù all o lefvañ a-hed a bloaz, abalamour d'an toulloù den a zo e-barzh o c'hoz, eo red anavez en so puzerour-mor (glaz) henn Sant-Stefan. N'eus ket da vezañ souezh : hag ar c'hoarieren hag ar fobal zo breur ha c'hoar e Sant-Stefan level a meur a lec'h all, gwir eo ! Ewid dastum gwerneñ, ez eus bet ur pevedidigezh (sossite) ispisial, ha warlene ez eus bet gouezet evel-se ur milion bennag la luroù newezi dre ar bruderezh glasaer. Kalz muioc'h a gouezo ar bloaz-mañ e-barzh godelloù heroset war an amez-e-vremañ, ljet ez eus bet zoken traoù souezhusoc'h-ouezhusaer : un hanter-wilion bennag a wikoloù glasaer zo bet graet dija ha gwerzhet e-barzh daou-ugent bro ha beteg ar JAPAN !

Peb henn zo lbr da abusañ e amez-vel ma kar, evel-just. Med, pa vez gwilet penaos emae kont gant ar fobal hag ar sponchoù all er broioù fachtist, pa vez gwilet tud prest da sodañ a Fians gant c'hoarieren Sant-Stefan ha JISKAR o tegemer aneñ war an ton bras hag o'h azeañ ober an trillo, pa vez gwilet traoù sort-se, ne d'ev ket ar bean kaout keuz d'al lamm tapet gant ar baotred en glaser. Ma'z eo chomet un tammig glasaer an opiom-se, gwelloc'h !

GENOD DIAES DA LOD  
fobel : mell-droed, brikolez ; bretteles ; Jekar ; VGE

## Troiad Giscard en Amerika hag afer al Liban



E-kreiz mis Mae ez eo set Giscard d'ober un tamm tro en Amerika. Pa kentañ president ar republik c'hall a oa ober un tamm bruderezh ewid ar c'harr-nej Concorde ha klask lakaad an Amerikaned da zegemer anezhañ war o aeborzhioù, ducast d'an trous spontus a ra an evn bras-se pa vez o sevel diwar an douar. Brammañ a ra, n'eo ket uhelloc'h med iselloc'h aged a veir, resped dioc'h.

Eil pa Giscard a oa stardañ al liammou etre ar Stadoù Unanet ha Bro-C'hall. Bet e oa lakaet ar re-mañ d'ar c'hoz ma oa De Gaulle e penn ar gouarnamant. Bremañ avad, emae Giscard da Ford, eo poent bras taolad an oil doug egile en arvor d'ar mare ma sikoure La Fayette an Amerikaned da vezañ mastr er gër, ha d'ar mare ma sikoure an Amerikaned ar C'hallaoued da gas kuit an Alamanned. Kement-se en deus displeget Giscard da Ford, da Giesinger ha d'an oil dud gwilet gantañ e-pad ma oa o forañ bro du-hont. Seilg puzegenn en deus graet, pemez aneñ e saccieg, ewid bezañ intant mad, moarvad, peogwir ne vez ket komprenet ar gallez gant an oil, ha peogwir ne vez ket komzet ar memes gallez e peb lec'h, da skwer e Paris hag e Louisiana. A-raog kuitaad ar vro, lewesonet sur a-walc'h gant Ford ha Giesinger, en deus diablaret Giscard un dra souzhus : «Ma'z eo a-du rennen al Liban, amezañ, e vo kaset ur rannarnae eus Bro-C'hall du-hont, da lakaad ar peoc'h etre an dud. Ha prest dija ugent mil soudard bennag da vont d'al Liban, hag en o-zoues ur bern Bretoned, peogwir ez eus e-barzh ar rannarnae-se pepar rejimant lec'hiet en Breizh, ha driest-oil er 41<sup>re</sup> eus al «Lande d'Oude» e kichen Roazon, rejimant ar Vretoned manw ewid an estren !

Setu prest adarre arme Bro-C'hall da vont da lakaad he fri e aferoù an dud all, d'ober ar polisa e breioù estren ha da lac'hañ tud, war zigrez lakaad ar peoc'h tro-zou ar Mor-Kreiz.

# LIZH EROÙ



Evruusamant, eo savet an darn vrasañ eus rennen al Liban a-enab memnos Giscard. A-enab ivez ar Broioù Arab, ar Baalistaned, Bro-Israel, zoken. Ha bremañ, an Amerikaned n'int ket gwial domm ken. E Bro-C'hall, emae an tu klez a-enab, hag ive tud zo eus kostezenn ar gouarnamant. Hemañ en deus souezet a-dreñv abaoe, ha moarvad ne vo ket klevet komz eus an afer-se ken.

Ur c'hwitadenn, eta, ewid Giscard, un taol graet buan ha buan, sur a-walc'h ewid ober piljadur d'an Amerikaned. Kement-mañ a ziskouez skiler ha aplañ penaos eo chomet kapitalized Bro-C'hall kar ha par d'ar re Vro-Amerika ha penaos n'eo ket set da get c'hoazh sors'hennoù koch imperialed gouarnamant Paris.

GEROD N'INT KET ANAVEZET EN OLL RANNTEZOÙ  
ew : lobouus, leposus ; d'ar c'hoz ; d'ar mare ; eo poent bras ; eo meli bras ; hemañ en deus souezet ; hemañ en deus kilet ; hemañ en deus tenet ar-dreñv.

GEROD DIAES DA LOD MARTESE  
pel ; but ; sors'hen ; sotias, radotage.

Beh daou vis lennit  
**AL LIAMM**  
ar gelaouenn nemeti o reizh, c'hwec'h gwech ar bloaz, barzhonegoù, kontadennoù, pennoù-ada a beb sort ha keleier. 80 pajenn e peb niverenn.  
Renner : Roman Huon  
Komanant : 30 lur, Studierien : 25 lur  
Mme S. CHEREL, 109, bd de Verdun  
RENNES - C.C.P. 2184-34 Rennes

D'an 8 a vis Mae 75  
Aotrou,  
Me zo bet astennet en ur welead na m'eus ket degemeret niverenn a vis Ebrel ha kalouenn «Pobl Vreizh». Dorneg e oa peogwir, abaoe diñ kaout kement nemed un niverenn, m'eus kavet anezhañ plijus ha speredeg...  
Dijaret a c'hanon, mar plij, ma n'eo ket mad-tre ar brezhoneg a vez gant dindeñ ma fluenn, med ne studian ar yezh nemed adigev ur bloaz -n'eo nemed 16 vloaz...  
D'ar 25 a vis Mae 76


E-barzh ma c'hoz douar bras, e vez din ur bigadur mas o ressew beb mod «Pobl Vreizh» hag o kavoud emae an tamm kalonikel deus e spered.  
Ya, m'eus ressewet niverenn a vis Ebrel «Pobl Vreizh», un deiz goude bezañ kaset deoc'h va d'her an 8. M'eus ket keuz diouzhtu bezañ kaset anezhañ, med bremañ ne m'eus mui...  
Goulenz a ran deoc'h da dremen heb bezañ distruet ouzhoñ abalamour da'm fasioù : n'eo ket c'hoazh di-ze ma brezhoneg, med ne gollan ket kalon : ar c'hozhoù an henn eo kentezoc'h.  
Claude RILLY  
Blots



Klasked Pobl Vreizh

**KOMANANT DA LE PEUPLE BRETON**  
E galleg flour penn-da-benn  
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX  
Hanw hag hanw-badez  
Chomlec'h  
A gass e gomanant : Amañ an arc'hant :  
boutin : 20 L (//) dre chekenn-bost (//)  
Skoaz : 30 L (//) dre vandat-lizher (//)  
Estrenvro : 30 L (//) dre chekenn-vank (//)  
C.C.P. RENNES 2365-65  
// Diverk' ar gerioù na servijont ket

**KOMANANT DA b/ POBL VREIZH**  
Ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn  
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX  
Hanw hag hanw-badez  
Chomlec'h  
A gass e gomanant : Amañ an arc'hant :  
boutin : 20 L (//) dre chekenn-bost (//)  
Skoaz : 30 L pe ouzhpenn (//) dre vandat-lizher (//)  
Estrenvro : 30 L (//) dre chekenn-vank (//)  
C.C.P. RENNES 2740-79  
// Diverk' ar gerioù na servijont ket



**Paperenn ewid goulenz mont e-barzh UDB**  
Hanw hag hanw-badez  
Chomlec'h  
Goulenz a ran moned e-barzh  
Unvaniezh Demokratel Breizh  
D'an (d'ar) ..... 19.....  
Da gass en-dro  
(troc'het pe adskrivet) da  
UDB B.P. 304  
29273 BREST CEDEX



# GOUEL POBL VREIZH

26-27

a Vezheven 1976  
war dachenn  
LANGOLVAS

e-tal  
MONTROULES



NONO

D'AR SADORN  
DA NOS

Daou ganer vrudet  
a vo:

Paco IBANEZ  
ha Jili SERVAT

Diouz hñu goude: e vo  
ur mell pezh

FEST-NOS  
Kasset en-dro gant  
DIAOULED AR MENEZ  
hag ar BLEIZI RUZ  
ha zeoù all.

25 Lur ewid mont e-barzh.

D'AR SUL

Kermess 'pad an deiz.

Da greisteiz, boued da zebrin;  
Kañef ha dañset evo deoc'h,  
'wid ma tiskenna gwelloc'h...

Da 16<sup>e</sup>: GLENMOR, hag  
ur GEVRENN.

Da 18<sup>e</sup> FEST-DEIZ gant ar  
BILHAOUERIEK, KANERIEK AN NOS,  
KDS-dei... standoù, evajoù...  
Ne gousto NETRA ewid  
mont e-barzh d'ar sul.